

CANAOUENNOU.

AR MERC'HETAER,

Grêt gant un den eus ar vicher

Par tonz : Pebeus quêlou o va Done.

ABOVEZ an devez milignot ma chanc' d'or mam genta
Cahout eur c'hoantadén avalou ; neus mert poanio er bed mā
Mortolod, escop, devezoar, bep hipni nens e viser,
Mais nens quet crioc'h planeden vit hini eur merc'hetaer.

Mil drinbuilh, mil displijadur, a rençq hemde anduri
Ne all quet paouës un instand, a tao en deveus sourci
Evel arc'had er radeneck, ne gonsiq morce mert hanter,
Pa ye hed an oll d'ho guele, e rod c'hoas ar merc'hetaer.

Guët e zeo bea dastumet, chadénet evel eor c'hy
L'quet da zivoal ar groagoe en rouantelz Turqy
Beza brontet vel un azen, samet vel eur marc'h glaouër
Argazet evel ar bleizi, eguet bea merc'hetaer.

Na neus nac h'Enor na profit da c'honit ebars ar stad,
Couscoude aben he hober eo ret beza dilicad
Cavet un teod deliberet, cul lagad lem a seder
Pacianted eur guenvieden, vit beza guir merc'hetaer.

Rot e dezan vel an targas guelet en devalijen
Beza souil vel al louarn, meür vel ar zilien
Calounecq evel a Leon, crapat en guis dar guinver
Beza squan evel er c'haro, vit beza guir merc'hetaer.

Beza gadal a servichus, cheriçzan ar yugale
Laret ez int patrom o zad evit plijout d'ar groague,
Gout tremen brao deus an tud coz, silsou mad o zolio caer
Pœa de banac'houl lapac'h vit beza guir merc'hetaer.

Cahoutdiouscouarn deus ar sqpiâtra, tevel pes a nens clevet,
Divoal mad da nêm vrabangst eus madelés ar merc'het,
Gout an tu da liva guévier, nac'h avec'hou pez zo sclaer,
Touët e ve noz da greis-te vit bea guir merc'hetaer.



Clevet propozioù dipitus, beza bouted en cojou
 Insultet gant cos rampenned, reï a receo bac'hadou
 Anduri meurbet aliès ar glao, an erch, an tomder,
 Fœltra e gorf ac e zillad ; stard eo beza merc'hetaér.

Miret un hor da vouigourat, miret eur c'hy da harzal
 Mont en tyer dre ar prenest mèmeus dre ar criminal
 Crapat demeus ar moguerio, gout lampat dreist ar guircher,
 Bale sioul vel al logod vit beza guir merc'hetaér.

Mœstrounia e zantimant, delc'hel claus var e sonjou
 C'hoarzin gant caon en e galon, squilla pez a gar daëlou
 Quemer, èrvé më red dezan, eur stum souret pe seder
 En neum divoazan da ruya, vit beza guir merc'hetaér.

Mæs ar starda deus ar vicher e zeo gonit ar merc'het
 Quisidicoc'h marc'hadoures na neus quet var boul ar bet
 Deus e divis, e santimant da bep hini renq hoher
 Lenn' nemeus bars en e sonjou vit beza guir merc'hetaér.

Vit dont aben deus eur seurès, eo red ober ar gluven
 Evit gonit un everès, goalc'hi d'eï he c'horzaillen
 Dar merc'het a gar nem benta, reï eur c'hoef, un davanger
 Laret amploc'h evit justoc'h vit beza guir merc'hetaér.

Gonde laquat e oll galloud, soueda e liardigou.
 Cavet fourgaç a nec'hamañ, cabouilhat dre ar pouollo ;
 E vanq' alies e doliou, et teu divrago dar guer
 Pinous vel eur c'hoeg diblunet, stard eo beza merc'hetaér.

Heuzi e ran pa gomprenao peguement a drabuillhou,
 A viser ac a boan speret a soufîr ar paour quès Pitou
 Mæs ar merc'het zo quen tentus a va c'halon quen tener,
 Ma zon en despet dam baro countraign da c'heul ar vicher.

AN DOGAN.

*Var ton : Ar plac'h ma zaves dar guener, pe var ton : Merc'het
 Kerhaës à lamp en aér.*

Peguen diot eo ar voazet,
 Pere ze nos de trubuilhet
 O c'heveçzai o friejou,
 Gant haouùn da zonguen ar c'herrio,
 Rac evrussa den a vale
 E zeo un dogan var ma fe.

Eur vreg fidel zo peuria
 O scandalat, pe o vouza,
 E c'hisquignat e c'hy, he c'haz,
 He matés, petramant he gonz.
 Ya evrussa dèn, etc.

Control dezi grég un dogan
 A zo dinosa evel un oan,
 Graio he goaz vel ma caro,
 Biplen comz rebec'h na glevo.
 Ya evrussa dèn, etc.

An oll a zo dézan mignon
 Ag'ar cheffo deus ar c'hantop,
 Banac'hon pezo agar lounqa,
 Ep ma renq jamæs oféa
 Ya evrussa dèn, etc.

Da vonéï Mikel mar n'al pea
 Na neus quet assier da nem gêna
 Termen en ho pez a garo
 Pa hel Fant da gaout au otro
 Ya evrussa dèn, etc.

Pa vo tom a brao an amzcr
 Na vezò quet d'alc'het er guer ;
 Gant e vreg et vo aliet,
 Da bournmen evit e yec'het,
 Ya evrussa dèn, etc.

Gant n'herruo quet re abred
 Laouën è vo diguemeret,
 E goan prientet a gavo :
 Ac e vele tomm, avecho.
 Ya evrussa dèn, etc.

Mar chanç de itron guilloudi
 E nem guinig ar gompici,
 Ac an oll a gao ar boguel
 Deus e dad pim patrom hanvel.
 Ya evrussa dèn, etc.

Bugale en heus a bep sort
 Ac ar re heon, ac ar re dort,
 Re vrunt, re du, ep caout ar boan,
 Do ober anc è unan.
 Ya evrussa dèn, etc.

Oll' tud e dy , ac e briet,
 Mar queret credi zo pentet
 Var an ton vras à la papa ,
 Ac e diegnès memeus tra.
 Ya evrussa dèn , etc.

Mar neus droueviés gant eure
 En justiç ne gollo morce
 A tao , ep mar , en ho al lanc
 Pa yelo Faantic er valanç.
 Ya evrussa dèn , etc.

Diboanyus ral e zeo arstad
 Neus mert zerrí e zaoulagad ,
 Mont ermæs eur vec'h an amzer ,
 Cana dre ma tosta dar guer.
 Ya evrussa dèn , etc.

Evit guir en oll doganet
 Na nint quet quer couls lodennet
 Mæs pa n'ho dê mert an hanter
 O c'hondition zo c'hoas caer ,
 Ya evrussa dèn , etc.

Evit hon me tânfoeltr biqueo ,
 Na heurenjin eur semelen
 Mar ne douné din , dirac testo ,
 E vin corniec vel eur c'haro ;
 Rac evrussa dèn a vale
 E zeo un dogan yar ma fe.

